

-:- NEDELEC -:-

Moderato.

F. M. D.



E - lez Dou - e, deuz an En - vou, Pe - rak oc'h



a - ma dis - ken - net? Pe - tra ' la - var ho kan - ti -



kou A dreuz an noz skle - ri - jen - net? Pe - tra ' la -



var ho kan - ti - kou A dreuz an noz skle - ri - jen - net?

I

Elez Doue, deuz an Envou
Perag oc'h ama diskennet?
Petra ' lavar ho kanticou,
A dreuz an noz sklerijennet ?

II

Da heuill hor Mestr var an douar
E tispakomp hon eskel gouenn,
Dezhan ' rankomp kana gloar,
Gant hor mouez hag hon telenn.

III

Gant hon telenn hag hor mouez
« Gloar dezhan ! gloar d'he Dad !
» Ha var an douar, levenez
» D'an holl dud a volontez vad. »

IV

Ne glaskit ket en eun ty aour
Kavel ho Toue, pastored.
Eun doën blouz, eur c'hraouik paour,
Setu palez Salver ar bed.

V

Lezit ho tenved er parkou...
Hèn a vezo pastor ive.
Kinniguit dezhan oanigou...
Oan eo c'hoaz, oan Doue !

VI

Deuit, tud paour ha tud entre;
Daoulinit hep aoun dirazhan.
Hèn ' zo paour ha dister ive.
Da guenta oc'h galvet ganthan.

VII

C'hui, d'ho tro, tud a renk huel,
Tud goueziek ha mondianed;
Ouhban eo red beza henvel.
Deskit-hèn gant a' Rouaned,

VIII

Diredit, bugale-vian,
Da veled ar Mabik Jesus.
Hèn ho kar, karit anezhan,
Hag evelt'han bezit sentuz.